



# KANTIK SANT VIO

E PARREZ TREGUENEC

Ton : *Peger kaer e zec Mam Jesus.*

*Diskan :*

Dalc'hit d'ho feiz, tud Breiz-Izel,  
Seul-vui ma roer dezhi brezel  
O klask diganeoc'h he lemel!

1.

Ra vo Doue en eny meulet  
Gant an oll Zent ha Sentezet,  
Ra vo meulet gant an Alet.

2.

Ra vo meulet var an douar,  
Gant moues kement hini her c'har  
Hag e pep feac'h, hag e pep mar.

3.

Ra vo meulet Doue e Breis  
Da veza roet deomp ar feis  
Hag he c'hendalc'het en hor c'hreis.

4.

Goude ive ra viot meulet  
Otrou sant Vio benniget  
En hor bro-ni kement karet.

5.

Guechall, Sant bras, en ho pue  
C'houi oa souten ar vugale  
Dre ho peden ha gras Doue.

6.

Otrou sant Vio, vel guechall,  
Hirio ive c'houi ho djouall  
Eus a bep drouk, eus a bep goall.

7.

D'ho feunteun leun a vurzudou  
A bep tu zired ar mamou  
Da ginnik ho bugaligou (1).

8.

Yec'het c'houlennont evithe  
Evit ar c'horf hag an ene,  
Ma chomint fidel da Zoue.

9.

Hag en ho chapel daoulinet  
Eur beden stard pa ho deus grêt  
Laouen d'ar gær e zint distroet :

(1) Ar pardon a vez d'ar zul goude kloz eisdez ar  
Zakramant.

10.

Ennoc'h pep labourer douar  
A lak he fizians, c'houi er goar,  
Rag ho kalloud a zo dispar.

11.

En danjeriou var ar mor don,  
Ar pesketour a greis kalon  
A c'houlen ho proteksion.

12.

C'houi c'heuz ar garg abers Doue  
Hag eus hor c'horf hag hon ene,  
Diouallit mad ho pugale.

13.

Eun deiz en env en ho kichen,  
Mar domp salvet dre ho peden,  
Pegen kaër vo hor c'hurunen !

---

Imprimatur :

Le 27 Juin 1906.

F. CORRIEUX, vic. gén.

---

Kemper, e ti de Kerangal.